



An aberioù

KLASK KELEIER

Klask keleier dre ur skeudenn pe war un daolenn.

	Sell ouzh ar bajenn
1. Peseurt diforc'hioù a zo etre an div foto?	3
2. Penaos emañ al loar e-keñver an heol pa vez marvor?	3
3. Peseurt liv eo pavioù ar gouelan gris?	8
4. Peseurt liv eo pigos an herlegon?	5
5. Da bet eur e oa uhel ar mor d'ar Sadorn 14 a viz C'hwevrer 2009?	7
6. Peseurt dervezh e oa diskennet pell ha savet uhel ar mor, da lavaret eo pegoulz e oa bras an ampled?	7
7. Peseurt dervezh ne oa ket diskennet pell ar mor, da lavaret eo pegoulz e oa bihan an ampled?	7
8. Pegoulz e oa bet loar gann e miz C'hwevrer 2009?	7
9. Betek pelec'h ez a ar mor er prad sall pa vez reverzhi vras?	2
10. Penaos emañ al loar e-keñver an heol pa vez reverzhi?	3

Evit respont d'ar goulennoù, klask ar respontoù war ar pajennoù merket.

	Sell ouzh ar bajenn
1. E-pelec'h emañ bro an aberioù?	1
2. Peur e oa bet savet ar pont kentañ war an Aber Benniged?	2
3. E peseurt bloavezh e oa bet louzet Aodoù Breizh gant petrol al lestr Amoco Cadiz?	6
4. Peseurt anv a vez roet c'hoazh d'ar Pont Krac'h?	7
5. Petra eo ur prad-sall?	2
6. Petra eo an tre?	4

Evit gellet respont gwir pe gaou, sell ouzh ar pajennoù merket.

	Gwir	Gaou	Sell ouzh ar bajenn
1. Uhel eo ar mor da hanternoz tro-dro d'an tour-tan.			6
2. Ar gourlen eo ar poent m'emañ ar mor en e izelañ.			4
3. Teir gwezh bemdez e sav ar mor en aberioù.			1
4. Bezhin a vez kavet en aberioù.			2
5. Evit pesketa e c'hell ar vorvran mont betek 30 metr dindan an dour.			5
6. Debriñ a ra ar gannerez louet amprevaned.			8
7. Lazhañ loened bihanoc'h egetañ a ra ar gouelan kein du.			8
8. Saout a bep seurt a vez gwelet war ar prad-sall.			2